


# DINDAN AR SPERNEN


*Non ha you*

Loreet gant « Kevredigez Breiz »


## CANTABILE MAJEUR



Ar - ru eo ar bleu - niou er sper -



nen, Miz Mae en deus Strinket a -



leiz Aour ha per - lez diouz e gu - ru -



nen War lan - ne - ier ha pra - jou

## MINEUR




Breiz Barz er Mae - ziou an am - zer ne -




ve A ro d'an ' holl, douster du -


## MAJEUR DOLCE



di Er Sao-nen peuc'hus klevet e



ve Ar Wazig dour o hi - bou -



di.

Arru eo ar bleuniou er spernen,  
Miz Mae en deus strinket a-leiz  
Aour ha perlez diouz e gurunen  
War launeier ha prajou Breiz;  
'Barz ar maeziou, an amzer-neve  
A ro d'an holl dousder, dudi;  
Er zaonen peuc'hus klevet e ve  
Ar wazig-dour o hiboudi.

Kement 'n eus buhe war an douar  
'Zo evurus ha seder-bras :  
Al lapousig a richan d'e bar  
Kuzet e-touez ar bcjou glas;

Ar bugel a vouse'hoarz 'n e gavel,  
Da c'hortoz e vamm da dostât  
Hag an ael bihan esa sevel  
'Vit ober allazig d'e dad.

Dre ar c'hoajou, eun aezennig flour  
A red, gant c'houez-vad ar balan,  
En eur luskella war veg ar skour  
Ar voualc'h hag al laouenan;  
Evel d'ar maner, d'al lochen blouz  
An heol a ro e vannou koant;  
Ar varzed el liorzou didrouz  
A gan war o zelen arc'hant.

An dud yaouank a ve evurus  
O welet goude ar gouanv,  
Dindan tomder an heol lugernus,  
Er wenojen ar bleuniou hanv :  
Kalon tud Breiz 'zo bepred fidel  
Hag o c'harante 'zo tener;  
Met, siouaz ! kouimig ha turzunel  
'Ve diskaret gant gwall-amzer!

Deiou levenez 'barz ar bed-man  
A dremen 'vel eul luc'heden,  
Evit rei lec'h d'ar poaniou brasan  
Da beurfrailha kalon an den;  
An Ankou digar ha didrue  
Ne zell ket ouz muian-karet :  
E-kreiz o nerz, war hent ar vuhe  
An dud yaouank 've diskaret.

Gwelet em eus dindan ar spernen  
Eur plac'hig beuet 'n he daerou,  
An avel a daole 'n he c'herc'hen  
Dizeliadur gwenn ar bleuniou;  
Kalon 'ar Vreizadez 'oa, stouaz,  
Bec'hiet gant eun anken garo :  
Klevet 'deus ar c'hleier o son glaz  
D'he mignon ker a zo maro !

Er memes lec'h, a boan ma 'zo bloa,  
En disheol ar bleun spern ken kaer  
Ar plac'hig kêz a gane gant joa,  
E-kichen he dous servijer.

Kaeran tra ec'h eo ar garante  
Harpet dalc'imat gant ar furnez !  
Daoust ma vev an den er baourente,  
'N e galon 'chom c'hoaz levez.

Meur a durzunel 'zo bet tizet  
Pa deue o far da vervel,  
Meur a goulmig koant, bet dilezet,  
'Nij seder dre vro Breiz-Izel..  
Oh ! plac'hig tener, da anken vras  
Gant amzer ive 'dremeno,  
Ha dindan bleuniou ar spern gwenn c'hoaz,  
Eun de, marteze, te 'gano !

Eur bloa goude, ar memes spernen,  
Bleuniet adarre en peb brank,  
A wel dindan he bolz o tremen  
Korf maro ar plac'hig yaouank...

Eun aezennig skanv 'deus diskaret  
War an arched bleun spern dispar,  
Ar vamm a heuilh he merc'h d'ar vered  
En eur skuilh daerou a c'hlac'har !

Tost d'an iliz koz <sup>er go</sup> ve,  
En disheol brankou eur spernen,  
*War bep lin* bleuniou neve,  
Eur groazig koad, eur gurunen !  
Eno 'e klever o hirvoudi,  
Kichen ha kichen alies,  
Diou vamm bacour, daoulinet da bedi  
'Vit ine o bugale gêz.

Laouenanig ar Roz.

*Yvon*  
Konstanza ar Meere